



Breizh Brevez

LE BRUN :
MEULEUDI AR REPUBLIK

F. BROUDIC :
STAD AR YEZ A-BENN 20 VLOAZ

N° 31

BRUD NEVEZ

KELAOUENN VREZONEG MIZIEG

N° 31 - MIZ GENVER 1980

Rener : Andreo Merser

Sekretour : Jakez Salaun

An oll lizerou ha skridou a zo da veza kaset da : BRUD NEVEZ, 6 ru Beaumarchais, 29200 BREST.

Priz an niverenn-mañ : 8 lur

Koumanant-bloaz :

- priz ordinal : 50 lur
- koumanant-skoazell : azaleg 60 lur
- studieren, soudarded : 30 lur
- broiou estrañjour : 60 lur

Eur houmanant-bloaz a dalvez evid 10 niverenn.

Ar chekennou-bank a zo da veza kaset war-eeun da : Brud Nevez, 6 ru Beaumarchais, 29200 BREST.

Ar chekennou-post a zo da veza laket war C.C.P. Brud Nevez 893-94 P Roazon.

I.S.S.N. : 0399-7014

Disklêriet hervez al lezenn : Kenta trimiziad 1980

C.P.P.A.P. : n° 34.627

Ar merour : P.-M. Mevel

Moulet gand Ti-moullerez ar Martolod, er Gelveneg (Imprimerie du Marin, le Guilvinec).

C. evid an oll bennadou.

N'eus ket a aotre d'embann eur pennad diwar Brud Nevez, heb beza bet an aotre d'henn ober.

Ar skridou hag ar pennadou a vez embannet e " Brud Nevez ", n'emaint ket da veza laket war gont ar gelaouenn heh-unan, war gont ar re o-deus skrivet anezo hebken.

Ar skridou ne vint ket embannet a vo kaset en-dro ma vez tu.

TAOLENN

- Golo gand Maya.	P. 2
- Da lenn araog mond pelloh	P. 2
- Le Brun : Amzer an drapo trikolor ha meuleudi ar Republik.	P. 3
Bet dastumet gand Kerlann	P. 6
- Louis Cong : Hekleo Traon Bouzar. II	P. 13
- Y. Miossec : Dreist ar mor braz. XIV	P. 21
- F. Broudic : Stad ar yez a-benn 20 vloaz	P. 27
- Rentaou-kont	P. 27
- Lizerou	P. 32

DA LENN ARAOG MOND PELLOH

Emaoh o paouez digemer kenta niverenn ha tregont Brud Nevez, — dindan eur golo nevez — hag a zo eta o kregi gand he fevare bloavez.

An niverennou all war-lerh a zo war ar stern, ha dindan ar wask dija : eur pez-c'hoari all gand Teatr Brezoneg Penn ar Bed (eur pez renket diwar an italianeg), pennadou gand Per Helias ha Per-Mari Mevel, kanaouennou, barzonegou, eñvo-rennou, studiadennou ha rentau-kont evel boaz.

Derhel a reer eta da labourad evid ma hellje Brud Nevez dond er-mêz beb miz. Hag e raio : daoust d'an diêzteriou, daoust d'an diouer a amzer, daoust d'ar hudennou arhant.

Ma hellit konta war skipaill Brud Nevez, e rankom-ni konta warnoh. Ha d'ar poent-mañ, eo o-deus eur halz euz ol lenne-rien da gas deom priz o adkoumanant. Ra o-devo oll soñj d'henn ober eta, ar henta ar gwella, kuit deom da gaoud follennou da gas deoh war ar marhad.

Adkoumanantit eta, ha dioustu. Med marteze, e hellit ober gweloh ? Kinnig a reom deoh evel ar bloaveziou all adkoumanant, n'eo ket evid 50 lur nemedken, med evid 100 ! Evid ar priz-ze, e kinnigom deoh ober 3 goumanant, ha n'eo ket unan hebken : hoh hini, hag unan all evid daou a dud. (1)

N'ho-po nemed digas deom anioi an dud-ze hag ho-peus c'hoant da goumanant da Vrud Nevez, hag o adres, hag e vo kaset ar gelaouenn dezo e-pad eur bloaz diouz ho perz.

Er stumm-ze, e vo roet an tu ganeoh da dud all d'ober anaoudegez gand Brud Nevez ha da lenn brezoneg : ha da Vrud Nevez da gaoud muioh a lenne-rien.

Mil bennoz en a-raog.

(1) Evel just, ne heller ket koumanant da Vrud Nevez er stumm-ze tud hag a vije koumanantet dija.

AMZER AN DRAPO TRIKOLOR HA MEULEUDI AR REPUBLIK

Bremañ, tud vihan ar vro, hag etrezom peorien,
Hellom 'n em rejouisa gand eur galon laouen.
Derhel a ra an drapo trikolor en or bro,
Ya, en desped d'an noblañs ha d'o hamarado.

Ober reer barz ar Frañs, desped d'ar veleien,
Da baotred o drapo gwenn, soucha war o zorchenn;
Allaz, 'n em drompla reont, siwaz dê (1) an noblañs,
Soñjal gand o fri treitour, dond da houarn ar Frañs.

Beza zo deuz on gouarn tud hag o-deus skiant,
Pere a deu d'on divenn penn ar gouarnamant.
Ar re-ze deu da ampech deuz paotr e livitenn,
Da zond da grouga ar paour, evel eun anduillenn.

O ! beza zo c'hoaz siwaz, kalz deuz ar Vretoned
A garfe gweled or bro gand an nobl gouarnet,
Hag a deu da vepriza ar Republikaned,
Beza deuz an esklavaj anezo bet tennet.

An dud-se dlefe doned da lenn istor or bro,
Vid goud o-deus on tud koz, bet kalz a soufrañso
Dindan an noblitate hag an oll veleien;
Ar micherour ha Yann-Gouer oa esklavajourien.

Ar paour barz an amzer goz ne oa mad da netra,
Med da labourad noz-deiz en e doull da zoucha.
Ne oa ket mad da dest, kennebeud da voti,
Tretet e veze siwaz gwasoh evid ar hi.

Goude ranke, ranke labourad, koulz en noz evel en deiz,
Vid beva ar veleien, an noblañs, ar roue.
Ne oa ket mestr en e di, d'e wreg, d'e vugale,
Gwerzet veze er foariou vel al loened ive.

An noblañs ken didruez vid en em egzersi,
A-benn mond da chaseal gedon ha klujiri,
A rê d'on tud koz redeg vel gad a-raog ki,
Tenna neuze warneze vel tenna war bleizi.

Ken braz veze ar gemez siwaz e-barz ar vro,
Ma kaved war an henchou kalz deuz a dud maro;
Leun o genou a yeot glaz 'klask 'n em zoulaji
Heb ma komere an nobl truez a hini.

Vel sparfell en e neiz e veze an aotrou;
Er heit-se en e gastell, leun a lorch, a bompou.
Med pa deve ahane da ober eur bale,
Lahe siwaz kalz a dud dre 'l leh ma tremens.

Vid laha gad pe glujar, war douar an aotrou,
E veze lahet an dud vid ar henta deiziou.
An nobl a lahe ar paour heb kaved tamm truez,
Pevar gwenneg warn-ugent e oa priz ar vuhez.

Ha pa 'n em gave an aotrou da bourmen en ho ti,
Ma veze ar vamm pe verh neuze d'e faltazi,
E vezent gwallet gantañ barz en prezañs an tad,
Hag an dra-ze d'an den paour, kredit, rê kalonad.

Ha pa gemere afer daou zen demeurez ar bed,
E ranke ar wreg nevez, noz kenta heh eured,
Mond gand manah pe noblañs da gousked en noz-se.
Ar paotr kenkoulz hag ar plah a gave gwall ziêz se.

Pa vanke an den ivez da bêa e aotrou,
E veze barnet gantañ d'ar rusta labouriou.
Beteg ampech ar raned da gana pad an noz,
Vid ma hallje an aotrou hag e itron repoz.

.....ved lodenn
.....poan al labourerien
.....rent demeurez o mobilier
.....vid ar paour, O ! na trista amzer. (2)

En amzer ma 'h om o ren dindan ar Republik,
Ar paour 'n-eus e liberte koulz hag ar pinvidig.
Ha demeurez poan e zioureh e hell tenna parti,
Heb n'hell beleg na noblañs doned d'her homañdi,

Oll ez om ingal bremañ dirag lezenn or bro;
Oblijet oll d'he divenn beteg eur ar maro.
Pa vem bremañ ataket gand on enebourien,
An noblañs a rank tañva lod demeurez ar zoubenn.

Dre-ze, noz ha deiz, bremañ zo droug en o halon,
Pa rankont sikour divenn o bro hag o hanton.
O ! Pa vezim Bretoned gouarnet gand noblañs
Ne vo nemed ar beorien neuze 't ivenn ar Frañs.

.....deus ket kavet jamez eun dra diêz, (2)
.....inutilamant redeg gwad ar paour-kâz.
P-odevo laket laha, siwaz deoh, ho pugel,
E vo seder o halon, e-barz en o hastell.

Klevet zo bet a-liez, koulz tadou vel mammou,
O lavared gand glahar, beuzet en o daerou,
'N-dije bet o bugale, ya, eur maro kruel,
Laket fin en o buhez, en kreiz tan ar brezel.

Goud a rit, sur, Bretoned, eo bet gwerzet ar Frañs,
Gand ar veleien siwaz, koulz ha gand an noblañs.
Ha c'hoaz o-deus c'hoant bremañ da zoned d'or gouarn,
Ober treuzi or halon, gand ploum, dir hag houarn.

Ar Republik or gouarn, abaoe pell amzer zo,
Hag a glask al lealded, houll ar brezelou (3)
Divennom 'ta anezi gand eur galon laouen,
Evid mad ar bobl izel hag hini ar beorien.

LE BRUN.
Bet dastumet gand Kerlann.

Imp. Chevalier, 29 rue des Fontaines, Montroulez.

- (1) deze
(2) Mankoud a ra penn ar gwerzennou; n'eus bet roet displegadur ebed gand Kerlann.
(3) « houll ar brezelou » : ?

HEKLEO TRAON BOUZAR

Pennad kenta Ar c'haz Mae !

II

KENDALH

Ne oa nemed eur zal-glas gand braz ha bihan, oll vugale Treouergad. Ar skolerez a ree ar pezh a helle : ar re vraz a zikoure deski d'ar re vihan ! Hag a-wechou ive ar hontrou. N'eo ket roet da bep hini beza euz penn kenta ar zizun ! Sofñ am-eus diouz kaier Olier ar Bosard. Pebez kaier ! Gand veloioù warnañ... hag a oa eun dudi spontuz evidon ! Bez' oa a bep seurt liou ! Na pebez kaier ! Hag hini Louis Gwenn, Ernest Petton !

Mme Gwivarth, anvet uheloh, ni a gollas kalz. Rag ober a ree d'an oll plega. Ar skol a oa e-kreiz ar bourk bihan. Ne oa porz ebéd : evid mond da c'hoari, an hent braz ! A-liez ez eem da henaoui da di ar hloher, pe d'ar hovell : bemdez e oa kezeg da houarna. Nag a draou da weled, da zeski, da c'hwesaad... Evel c'hwez ar harniou devet gand an houarn ruz. Pe c'hoaz e traoñ ar bourk, o weled digor braz or brennigennou (29), kilvizien ha marichaled asamblez oh houarna kirri. An houarn kaset da hlaou e-barz eun tantad taouarh abaoe ar mintin abred. Pevar gwaz pe ouspenn a groge ennañ gand turkezoù estlammuz, e zigase ganto a-uz ar rod koad nevez flamm. Ha kerkent diskennet en e blas : dour dezañ, tro-war-dro, d'an houarn da yenañ ha dezañ da starda ar rod nevez. Ar voused o-doa aotre da zelled, mez pas a re dost pe e klevent buan : — « Alle, ar voused... diwar an hent ! D'ar skol ! Greet eo ar galv ! Ha ni gwazed ! Ni on-eus gounezet mond da derri or sehed ! deom da weled Anastaz ! »

(29) brennigenn : brennidenn

Ken peguz all oa gweled Lom pe Antoine ar hloher oh ober eur prenestr nevez, pe gleuza eur wentell (30) nevez, skina anezi hag echui al labour en eur rod fourmal, pe c'hoaz en eur rod bwetur, fin he skinou evel dent grib da ziresti (31) lostou ar hezeg. Ne zoñj ket din e reed c'hoaz er bloaveziou-ze arbelliou nevez e ti ar hloher... Kement-se a dlie ive beza e gwirionez eun dra bennag ! Ar hestell kirri a-raog ar vrezel pevarzeg a veze heskennet dre dud war ar blasenn dirag Ti ar Tepod, ar buro butun. Mez bremañ an heskennerez a zo e Milin Traoñ gand ar gilvizien : n'eo ket ken an heskenn vraz a ya d'ar vezenn, mez homañ stardet war eur harr war raillou eo a ya war-zu an heskenn ruban a dro gand dour ar vilin.

Med amañ n'emaom ket ken er bourk. Er skol ar skolèrez yaouank bremañ he-doa poan kalz gand lod euz ar baotred vrasa ! Eun devez e krogas da ouela dirazom, rannet net he halon. Hag hi er-mêz diouz ar zal da glask sikour... gwazed ar hovel. Kaoud a reas zoken tad unan euz or hanfartet. Petra bennag n'oa ket douetuz an terrupla ! Laou Merser ! Kerkent pep hini ne vouje ket ken en e blas ! E-giz ma vijem deuet en eun taol da veza élez o studia santellamant e Skol ar Republik.

Laou a deuas er zal, a zavas er penn kenta, e zaouarn sarret reud gantañ, o selled a-gleiz hag a-zehou o klask e vab. Ne gave ket anezañ, gand an imor a zave ennañ. Erruet er penn all, e tennas e voned plad, e kreñchas e-barz e jikenn, e troas e gein ouz an tablo. Ha setu Laou mestr-skol. Eñ ha ne oa bet nemed ken nebeudig gwechall ! — « Petra an nondedie a glevan ! An dra-ze n'eo ket eul labour eo ! An hini a zistreso an disterra kenta tro e vezo... kignet dezañ e reor ! Gand ar gontell goad ! Hañ ! Aze emañ, kalkenn vraz ! » Ha Laou da lakaad boned ha chikenn endro war e benn. Ha... dao digad d'e vab ! Hag eñ kuit... o lesker an nor zigor war e lerb. Dizrei a reas c'hoaz : — « D'ar bramm kenta, me a deuo endro ! » emezañ. Ar gentel a jomas eñvoret. Mez n'ouzon ket hag-eñ e oe pouezuz kement-se !

Kement tra a nevez er Bourk a ree levezet ha plijadur ar vugale, a lemme a beb mod o daoulagad kiriu. Hag e vent c'hoaz bihannig en eur dreina renkadennou bouestou sardinéd, hag oh ober « taf-taf-taf », evel treñ patatez Lanrivoare.

Eun devez goude ar skol edon gand Charles Geroulac'h va henderv, sebezet an daou baotr war ar blasenn o weled an orolajen tour o trei he-unan he nadoziou, evel ma tro ar ribot er gêr. — « Petra a zo en em gavet gand homañ ? » emezo.

(30) eur wentell : kreizenn goad eur rod karr
(31) diresti : diveski reun lost pe voue al loen.

— « O vond da ziroll ema-hi. Sell 'ta ! Sell 'ta ! » Den ebed war-dro e neb leh. Digor dor an tour, en traoñ. — « Ma yafem da weled ! » Me gav din oa an dro genta din da lakaad va zreid e skalier an tour war-dro... ha war-dro c'hoaz heb fin ebed. Ar henderv a oa kosoh, ha surroh euz e daol. Anez am-ije kaillet (32) pell a oa. Trei a reem atao didrouz, o sevel uhelloc'h a-nebeudou. Beteg ar zolier genta e yafem. Netra eno. Ha dao uhelloc'h c'hoaz ! En eil solier e chomom barmet o weled daou labourer e beg o skeulioù war-dro an orolaj. Barz ar fin e oam gwelet. — « Petra ? Mond a reoh d'an traoñ ah alese buan ! Pas re vuan, evelato ! Na dorrit ket ho kouzoug ! Sell 'ta ! Sell 'ta ! » Hag ar baotred d'an traoñ a hellit kredi, heb goulenn o rest : euruz n'en-doa den ebed tostaet euz o skouarnioù !

Ar pezh a ree deom « pedali » ar muia d'an oad-se oa bremañ ar ruill ! Eun tamm kill houarn greet evid eur wentell bennag peurvuia. Ha zoken ponnerig a-wechou da vond a-raog eur vaz pennet a-dreuz gand eun tach, gand eur « bobine » o trei endro dezañ ; lakaet ouz ar ruill. Ar paotr a groge en e ruill evel hirio en e velo, o lakaad « bobine » penn e vaz da zikour ar ruill da drei. Ha dao dipa-dapa war-lerh ! Ha pa ve evid meur a fouetat mad a hent. E gi a yee a-liez da heul ar jao hag a denne hir ha ledan e deod pa blijje gand ar paotr ehana eun tammig. An dra-ze a oa jimnastik, me lavar deoh ! Ar ruill a dinte, a zañse war an hent, heuliet dalhmad gand ar « bobine » hag ar paotr, trempet oll gand e c'hwezenn. — « Diouz a beleh e teuez c'hoaz evel-se ? Trempet adarre gwasoh eged ma vije bet o falhad ! N'eo ket posubl ! Na pebez iñvañsionou a gavoh hirio ! Gwechall, ni a haloupe nebeutoc'h eged-se ! »

Meur a dro avad ive, ar ruill a zirolle o tiskenn eur hreh, a gemere a-raog dirag divesker berr ar paotr. Hag ez ee, a-lammou braz dreist eur hae bennag e-touez al lann, pe an dreiz... kollet evid eur pennad. Ar peb brasa ahanom a deue evelse d'ar skol beb mintin, ar vuzetenn ouz ar hein hag ar ruill o trei dirazom. A-raog ar bourk, oa red mad renka ar ruill en eur guzadenn bennag. Ha beb an amzer, ez ee ar ruill gand al laer ! Mez gand piou ?

N'oh ket bet tro ebed o vouara ? Dre amañ ez eus bet atao mouar e-leiz e kement kae a zo er vro. Al louarn e-unan a za da vouara o paka ar pezh ma hell, pe c'hoaz ar mouilhi. Mez ar vugale ive, ha kalz re all c'hoaz. Toulladou mad a bodou koñfitur a vez karget ganto beb bloaz. Hag ar histin e miz gwengolo ? Ar C'hlik eo ar hoad a zo er penn all d'on douarou e leh ma teu eur bern tud da gistina. Setu n'ho-pezo peurvuia ket ouspenn deg pe ugent lur beb tro. Hirio c'hoaz, evel

(32) kailla : kuitaad ar stourm.

gwechall, eo eur wir regaladenn beilla gand kistin grilllet dindan ar glauo ! Hag e Kergonk ive evel just.

A beb amzer n'eus ket bet kalz a frouez er vro dre ma'z eo re avelet marteze. An avalou a zee atao gand al laer, glaz kaol c'hoaz en nebeud gwez a helle beza e ti pe di. Ha zoken re ar presbital daoust d'ar mogerioù uhel e teue beh warno eur wechig bennag. Spezard a oa a-wechou e lod jardinoù... Tante Valentine ive a dlee digeri braz he daoulagad evid divenn he folotez diouz al laer e Milin Pont-Brenn. Mez bloavezioù a deue ive e veze ar polotez a-bleg ouz ar skourrou ! Hag e vezed pedet ganti da zond da gutuill eur vuzutennad.

Eur winienn bennag a oa a-wechou ouz fasadenn heoliet an ti, evel e Langiueuz, pe e Kervignen sur a-walh gwechall. Mez rezin na veze ket kalz, ha c'hoaz e choment c'houero : re zouret gand ar glao, hejet gand an avelioù ha tommet ken nebeud gand heol miz here. A-hend-all, e kaved irin kalzig ha mesper eun tamm bennag, eur berenn ouez beb an amzer, mez c'houero atao ! Ar voused gwechall em yaouankiz a zebre n'eus forz petra er parkeier : karotez ruz, irvin, ruta, delioù kaol, pomed zoken, trichin-logod, hag... ognon pe gignen frotet dezo ouz ar bara, pa vanke an amann ha pa ranked e zebri e seh.

Trapou a reem er bernioù kaoh-kezeg evid al laboused. Hag eul las bennag zoken da glask tapa eur glutjer bennag a-hed ar fecher (33) er parkeier. Ober a reem anezo gand reun diouz lostou ar hezeg. Ar hi a c'hoarveze dezañ beza starnet ouz eur garrigell bennag greet dezañ euz e zoare. Mez a-liez ne blijje ket dezañ kalz ar c'hoari-ze. Setu ma fache, ha ma'z ee fall ar stal. Bez e oa goulskoude chas dreset e gwirionez evel eur gazeg limon. Souezuz ? Goulennit digand Job Kervered. Ha pa deu eur hi a zianvez wardro yer an tiegez, a-bred a-walh a-wechou e vo tapet. Staget mad dezañ neuze ouz e lost eur gastolorenn goz bennag, ha losket da glask e ribinoù etrezeg e gêr !

Ma c'hoarveze an dra-ze en eun tu bennag, e klevet riboul o tostaad a-raog treuzi ar bourk. Hag eun dro pe eun all e oa meur a hini o kemered o flijadur evel-se o weled al laer paket o « tihasti » ar pezh ma helle war-zu an « étape », evel paotred an « Tour de France » ! Mez bez e oa ive aze traoù a-walh da ober diroll eur jao bennag kavet war an hent. Tonton Visant bet e Keruzog o kerhad eur falherez gand e zaou loen a dremene dirag Langiueuz. Ar bouh a oa en e liorz hag a lavaras : — « Bê ! bê-ê ! » dezo euz e wella. Mez flêria a ree

(33) fecher : fizier (ale a vez distaget che a-liez e Bro-Leon)

en devez-se muioc eged biskoaz. Ha setu ma savas c'hoant gantañ diskouez e ouie ober e ganfart : ober eur jiboutig dezo ive ! Ar hezeg a rohe gand ar c'hwez spontuz. Ar falherez a ree trouz war an hent groz, unan euz ar hezeg a reas eul lamm treuz. Eben a gemeras aon evid mad ! Eur wech lañset, Tonton Visant a oa bet buan skubet diwar e dorchedenn.

Hag ar jao dirollet a bignas da Gervered, ha da ziskenn da Benn-ar-Prad, d'an daou-lamm. Ne oe ket eno ma kollas ar falherez kêz he rod kenta, e mil damm. Hag an eil a-raog en em gaoud er bourk. Ar hezeg a jomas a-zav e Bali Pont-ar-Bleiz etre diou wezenn : ne oa mui ganto a heller lavared nemed limon ar falherez paour. Med an hini souezet diouz e weled ar muia en afer-ze a zo bet atao bouh ar « Markiz » ! Gwir eo ne gomprenas morse seurt all ebed nemed « galleg » ar « Markiz » : Tonton Saik ! Ne gomprenas seurt ebed er pez a rebeched dezañ, tamm ebed muioc eged er zahad foenn roet dezañ da dourta d'an « okazionou » braz e Langiouez. Neuze atao, e teue ar Markiz da brezanti dezañ an dud resevet, dreist-oll ar vugale ! Ha d'e bedi da ober eun nebeud troiou sirk. Ar pez a ree ma'z oa en imor vad en deiz-se. Eur bouh a oa eta er vro. N'ouzon ket avad hag-efi e oa eur havrig bennag.

Mez daou bastor defived a oa d'an ampoent er barrez : Tangi hag e amezeg : Saik ar maoutou. Gwechall, en amzer goz, e veze touzet ar maoutou d'an nevez-amzer e Pontig-an-Defived, e traoñ Milin Gerbrieg. Red oa kaoud dour da walhi ar gloan da genta, e griba goude, dreist-oll kagel (34) al lostou.

Mad ! E pe leh emañ ? Deom c'hoaz war-lerh maoutou all... ken fin all ! Genaoueg braz on bet atao ! Da genta traoù a-walh da baka lemme (35) brao ! War dro va seiz vloaz eo am-eus paket va lamm kenta diwar gein eul loen. Tonton Visant a oa deuet da zikour va zad evid eul labour bennag. Ha goude mern oa red kas ar gazeg Fanny d'ar gêr da Bont-Prenn. Sofijal a reed e raje kement-se ar paotr Louis. Lakeet oa brao war gein Fanny hag en hent. Perag ar paotr a hopas war ar gazeg ? Ar pez a zo sur, ar gazeg en em lakaas da drotal. Ar mous a gemeras aon, setu ma'z ee bremañ d'an daou-lamm war-zu an Enez Rouz. E kom-tro ar Gwez dero, ar paotr a rinklas a-gostez hag a ruillas d'an douar. Ar gazeg a dardas krenn evel m'he-dije komprenet n'he-doa ket greet mad. Ar paotr bremañ a voude o vond endro d'ar gêr pa erruas e dad hag an tonton a-dreuz ar Park Lakoun : — « Leñva a ra ! Mad eo ! Ne die ket dezañ kaoud kelz a

(34) kagel : liester kagal
(35) lammou

dra !... »

Blejal am-oa greet gand va aon, hag evel-se am-oa ive spontet ar gazeg. Blejal a ree ive ar gurusted pa deue Nedeleg. Ne oa ket ezomm deski dezo evid kana endra hellent !

« Pa deu ar briñsed war ar bed,
N'eo ket a druillou int gwisket !
Gwisket en arhant hag en aour !
Ar Mabig bihan a druillou paour !
Nouel ! Nouel !
A galon vad da dud an ti,
Eur bloavez mad !
Eur bloavez mad digand Doue !
Joa ar baradoz d'hoh ene ! »

Ha goude-ze e veze roet dezo o halanna. O vond kuit evel just, d'ar hi oh harzal ive stag e penn all ar porz, evid ober dezañ egari c'hoaz muioc, e roent penn o baz dezañ da jakad. Ha kuit adarre en eur gana.

E miz gwengolo a-raog eo e oa kavet deom eur breur bihan, « dindan pont Plougastell » Nag e peleh ! N'eus forz. Setu ma'z edom evid eur pennad devez e Pont-Prenn, gand va diou hoar vihan vrasa etre Tonton Visant ha Tante Valentine. Ha daoust d'ar ravanou (36) a-dreuz, d'ar skalierou diêz a-walh evid divesker berr Yvonne, daoust ma oe bountet dreist, ha ma yeas da goueza war eur mên bennag en tu all, he leñva a oe sehet buan gand he mêronez. Aze edom brao on tri ganto.

An ti nevez a echue e Pont-Prenn. Mez n'edont ket c'hoaz e-barz. Nag a draou a oa da weled endro d'ar vilin, d'an dour, d'an ti koz ha dreist-oll da Vedor ! Morse n'am-oa gwelet eur hi desket evel-se evid c'hoaz. Pennadou keuneud, hir zoken, taolet dezañ gand Tonton Visant e penn all ar foenneg a veze digaset dezañ endro, ha zoken mein taolet dezañ e-kreiz dour al lenn. Ar hi a boagne euz e wella d'e dapa ha d'e zigas endro evid plijoud d'e vestr. Rei e bao, chom jiboutig ! ... Sur Medor oa an desketa e Treouergad, dreist-oll abaoe ma'z oam kamaladed.

Ar henderv Francis Keroulac'h, bihannig c'hoaz, a oa bremañ ganeom e Kergonk dre ma'z oa klañv-kenañ e vamm, Tante Mari. Karg on-doa d'e bourmen en eur wetur vihan. Eun devez, setu ma yafem war-laez ar waremm vraz. Evid mond e ranked bounta kreñv war ar hreh, hag e yeas mad ganeom an traoù. Mez evid dond endro, pebez trubuil ! Ar wetur a gemeras buan tiz war an diskenn heb ma helljem he

(36) gwenjenn barz eur parkad ed.

delher. Diroll a reas, va zud keiz, evid mond da dreunia er foz kenta a gavas war he hent. Ar paotrig a oe kaset da roudella e-touez tammou lann ha drez. Euruz dezañ dija da gaoud eur penn Breizad greet mad. N'en-doa bet muioh eged eur gignadenn bennag. Ni avad, n'edom ket fier, me dreist-oll gand va c'hoarezed.

Ar re-mañ a gomañde ive a-liez a-walh ar c'hoariou a vije greet. Hirio e vije unan diouzom klañv. Ledet oa war ar pell kerh e foñs al lokenn : lakeet e oa dezañ braoig a-walh eun druillenn bennag war e harr, pe war e vreh, evid « pañsi » anezañ. Kavet e oa eul louzou burzuduz : nebeud greun kasis friket gand eul loiadig sukr hag eun diveradenn zour war gorre. Ha louzou d'ar hiañvour... beteg ar pare !

E serr on labour vrasa, diwall ar zaout, on-doa c'hoariou all. Sevel war eun tamm gwezenn bin, he brankou pladet evel eur grampouezenn, a zaouzeg troatad diouz an douar. Ni a rampike (37) aze gand plijadur pa veze brao an amzer : aze edo ive or hêr deom-ni.

C'hoari eun dro bennag a reem ive da Vari, or plah koz, hag a gare kalz ar vugale. Eun devez, Yvonne a doullas he fenn en eur goueza. Gwada a ree ha setu Mari gêz ha n'oa ket gwall fin, stravuillet oll da glask'petra da ober : gwella a gavas a oa bet boudal ar horn d'or mamm dond d'ar gêr diouz ar poull kanna. Ar plah koz a leñve kement hag ar verhig. Mez ma kare ar vugale, e kare ive kalz zoken ar viou fresk hag eur banne dienn beb an amzer. Aze edo an dalh ! Claude, eur henderv all, eur wech o weled pod an dienn sevel d'he muzellou, a reas eur vountadenn groñs war ar pod... da doka Mari goz evel biskoaz n'eo bet !

On amezeien oa bremañ bugale Janig Gerbrieg : unneg a vugale ! An tad a oa devezier en tiegeziou diwar-dro. N'oa ket druz ar geusteuenn zoken gand gwella bolontez Janig. Evel just, d'ar bloaz nevez, ar vugale gosa a zee evel ar gurusted da zoueti ar bloavez mad e meur a diegez. Hag e teuent d'ar gêr gand eur gwenneg bennag hag ive dillad deread c'hoaz evid sikour o gwiska. Nag a ebad a veze ganto en hañv o patoullad en dour er haniou dindan poñchou ar vilin goz kouezet en he foull. Ind-i a loje er pennti gand eur prenestr hebken, mez eur chimilar braz da domma an dud hag ar boued. Ar vugale a gouske er gweleou daou pe dri asamblez. An tad a veze atao laouen, ha Janig leun a varvaillou, a-wechou eun tammig groz, gwir eo. Mez an dud vad-se a zeblante euruz en desped d'ar verrentez peurbaduz da baka an daou benn. Hag ive amezeien vad, evel re an Enez Rouz.

Louis Conq.
Da veza kendalhet.

(37) rampikad : ober ar rampik a zo evid bugale sevel war eur skaon, pe n'eus forz petra, med goude ne ouezont ket, pe ne gredont ket, diskenn endro.

DREIST AR MOR BRAZ

XIV

War vord an hent e kaver beb an amzer plasou greet evid lakaad an otojou. Per, pa gav dezañ ez om eet uhel a-walh, a lôsk e oto war unan euz ar plasou-ze hag e kemerom da vond da bourmen, unan euz ar gwenojennou a zo bet digoret dindan ar gwez. Ar re-mañ a zo mantruz gweled pegen stank ha pegen uhel int. Sevel a reont eeun-tenn beteg pemp ha tregont pe zaou-ugent metr, marteze ouspenn. Gwir eo n'eus ket a leh da veza souezet pa ouezer pegement a zour a vez atao endro dezo ha pegen tomm e vez an amzer e-kreiz an deiz e-pad ar bloaz.

Mond a reom goustadig gand ar wenojenn, rag tenn eo ar zao, ha pa lakaer an troad war an douar, ne gaver dindannañ nemed pri.

Dre ma savom e welom gwez kalz kosoh, kalz brasoh ha kalz uheloh, gwez dero ha gwez peupli dreist-oll. Beb an amzer eh en em gavom dirag eur wezenn bennag bet diskaret gand an avel foll pe gand ar gurun. Dre amañ e vez arnev a-liez ha gantañ e sav korventennoù braz hag e kouez pil-dour.

GREZ BRAZ HA PLANT TROELLEG

Eur wech taolet d'an douar, ar gwez ne badont ket pell. Breina a reont koulz lavared dioustu gand an umidite hag an dommder. Er vro-mañ an natur a zo kreñv a-walh da lakaad an traou da zevel buan, med ivez d'o distruja buannoh c'hoaz.

Traou souezuz a weler abalamour da ze : meur a wech, en eur bourmen, eh en em gavom dirag ar gwez braz, ar beur-vasa anezo gwez peupli, gand o gwriziou teooh eged morzed eun den, gwintet uhel en êr a-zioh an douar, uhel a-walh a-wechou evid ma hellfed paseal dindanno en eur blega ar hein eun tammig. Petra 'ta a zo c'hoarvezet gand ar gwez-se evid o dibrada evel-se diwar an douar ? Netra nemed e oant diwanet pep hini anezo war gef eur wezenn all bet trohet. Ar blantenn nevez he-doa greet gwriziou war ar hef ha lakaet anezo da vond dreistañ ha da ziskenn betek an douar. Etre ma'z eo bet beo ar hef, he-deus kemeret harp warnañ. Goude, eur wech breinet ha dispennet hemañ gand ar glao, ar gwriziou, deuet da veza krefiv, o-deus dalhet ar furn o-doa ranket kemered. Chomet int dizolo ha dibrad war an douar. Lavared a rafed beb tro ez eus eno eun dorn spontuz krapet he bizied a-zioh an douar.

Med ar souezusa marteze evid eur Breizad eo gweled pegen druz eo ar plant all dindan ar gwez braz, dreist-oll ar plant troelleg. Ar re-mañ, eur wech diwanet, a zav betek neh eur wezenn bennag, ken teo ha garr eun den, a ziskenn diwar eur brank betek an douar hag a zav adarre war eur wezenn all.

Dindan ar gwez ez eus c'hoaz plant all, rododeñdroñ ha siklamen, hag a deu eno ken stank ha ken fonnuz ma sav lod anezo betek tri pe bevar metr da nebeuta.

N'EO KET EVEL BRESTIZ

Menezioù a zo zoken hag a n'eus ket eur wezenn warno. Goloet int a rododeñdroñ hag a siklamen. Ar re-mañ a ra evel eur vantell hlaz war o hein. Pegen dudiuze e tie beza ar gwel eno, d'an nevez-amzer, pa deu ar fleur er plant-se !

Dre ma'z eom dindan ar gwez, ez eus eun dra hag a deu muih-mui da skei on daoulagad hag on diskouarn : an dour-red a ziskenn, a ziruil kentoh, endro deom dre ar hoad. E kement gwaz a zo, ez eus kas gantañ; kement rivier a zo, a zo eun torrent leun a gounnar, gwenn gand an eonenn. O paouez treuzi unan emao, war eur pont koad striz. An dour enni, o lammad euz an eil roh war eben, rehier heñvel ouz re an Uhelgoad, a zo ganto karnach a-walh da vouzara ahanom. Med, daou hant metr pelloh dirazom, ez eus eun all, kalz krefivoh c'hoaz an dour ennañ ha kalz muih a garnach gantañ. Pa dreuzom anezañ, war ar pont koad nevez greet gand gwez teo tallet a daoliou bouhal, ne hellom ket entent an eil ar pez a lavar egile. Tonnou an dour o skei war ar rehier a laka an douar hag ar pont da grena. Kement a gas a zo ganto ma sav diwarno beradou fin ken stank ma reont evel koumoul bihan a-ziouto.

Goulskoude, amañ hag a-hont, ez eus e-harz eur roh vraz, brasoh eged ar re all, eun toull don hag a chom an dour ennañ da drei, evel ma 'n-ije c'hoant da gaoud eun tamm ehan. Eno, a lavarer, ez eus pesked braz a-leiz, dluzed dreist-oll. Med divennet eo pesketa !

Tud Knoxville ne chomont ket e kêr da goll o amzer d'ar zul. Gweloh e kavont mond da bourmen war ar mêz ha dreist-oll er « Smoky Mountains National Park ». Ar park-mañ n'emañ ket pell evito, war-dro hanter-kant kilometr, ha da vond betek ennañ ez eus eun hent braz kaer. Pa deuont da bourmen ennañ, ne reont ket evel Brestiz, pa'z eont da goad ar Hrannou. Ne chomont ket war o diadrefiv, e-kichen o oto : felloud a ra dezo lakaad o horv da boania. Mond a reont, koz ha yaouank, da vale betek neh ar menez, seiz pe eiz kilometr da zevel ha kement da ziskenn. Ouspenn, a-leiz anezo a oar goude kenderhel da veza laouen. Kement hini a en em gav ganeom, o sevel pe o tiskenn, a lavar deom eur ger bennag, evel war ar mêz e Breiz, evel ma vijent kontant o weled ahanom.

PETRA EO EUR PARK BROADEL ?

Med petra eo ar « Smoky Mountains National Park » ?

Ar « Smoky Mountains » a zo menezioù uhel (bez' ez eus hag o-deus ouspenn daou vil metr) hag a zo e kostez kornog Stad an « North Carolina ».

Hanter-kant vloaz zo, ar menezioù-ze hag ar hoajou a zo warno a oe prenet gand an diou Stad ha gand kêr Knoxville evid beza dalhet gouez e-giz ma oant gwechall pa oa deuet an dud gwenn enno. Gouarnamant an Tennesi, hini an « North Carolina » ha mêr Knoxville a felle dezo derhel vak toud an douarou a oa eno, abalamour da dud an diou Stad, ha dreist-oll da re Knoxville, da helloud mond da bourmen ha da gemered an êr vad. Med ouspenn e soñjet lakaad touristed da zond er vro.

Abalamour da ze eo ez eo bet greet eun « National Park », ar Park Broadel, euz ar menezioù.

Poent e oa ober eun dra bennag eno, rag ar hoajou, da fin ar hantved diweza hag e bloavezioù kenta ar hantved-mañ, a oa bet koulz lavared distrujet ar gwez enno. Rouez eo bremañ ar gwez braz koz. Gweled a reer goulskoude unan bennag c'hoaz.

Med en hanter-kant vloaz tremenet ez eus bet greet labour

vad. Deuet eo ar gwez da veza stank adarre. N'int ket c'hoaz ken teo hag a re a oa a-raog, med uhel int dija ha kreski a reont buan.

Eur ouenn gwez a zo goulskoude hag a n'eur bet bet gouest d'he lakaad da gregi a-nevez, hini ar gwez kistin. Ar re-mañ, a lavarer, a oa a-leiz outo dre ar vro, re gaer zoken. Med oll int bet diskaret gand eur hieñved kouezet warno ha bremañ ne stagont ket ken.

Med ar hoajou hag an douar-labour (rag meur a diegez a zo ivez etre ar menezioù en traoniennou ledan) n'int ket bet prenet heb ober poan da veur a hini, d'ar familou a oa o ziegez dezo hag a oa eno daou hant vloaz a oa. Ar re goz o-deus aotre da genderhel da chom en o ziegez tra ma vint beo, med bugale war o lersh n'o-do ket ken.

Gweled a reer c'hoaz, pa'z eer da bourmen en traoniennouze eur vandenn loened-korn beb an amzer o peuri er prajeier. Med n'eus ket kalz ken. Pa'z aio kuit ar beizanted diweza, ne chomo den ebed da veva war ar menezioù nemed ar re a zo karget da weled war an « National Park » ha da vired na vije dihasstet ennañ an traou hag an anevaled.

Red eo lavared, abaoe hanter-kant vloaz zo, ma vez roet aotre da besketa en eur rivier bennag (ha c'hoaz ne vez aotre nemed evid daou pe dri besk), ez eo divennet chaseal ha tenna plant pe fleur. Abalamour da ze ez eo deuet al loened gouez (an ourzed dreist-oll), al laboused hag ar pesked da veza ken niveruz hag ar plant da veza ken stank ha gwechall-goz.

Ar « Smoky Mountains National Park » a zo douar a-leiz dindannañ peogwir e-neus pemp kilometr ha pevar-ugent hed (muich eged etre Kemper ha Brest) ha tregont kilometr lehed, da lavared eo war-dro pemp kant mil devez arad. Ne vank ket ar plas da bourmen ennañ. Lavared a heller zoken ez eus c'hoaz ennañ douarou ha n'eus bet den ebed enno abaoe ma'z eo bet krouet ar bed.

Al loened a zo ar muia anezo er park hag ar re a vez gwelet an alies a eo an ourzed du. Ourzed a zo bet atao eno war ar menezioù. Gwechall zoken, tud ar vro a chasae anezo, d'an diskar-amzer, evid o hig, pa vezent lard, ha, d'an nevez-amzer, pa vezent treud, evid o hrohenn.

Bremañ n'eus ket c'hoaz kement anezo. Meur a hini a zo goulskoude. O gweled a reer a-leiz e-pad an hañv. Lavared a reer e teu dezo dond da drei endro d'an otojou. Ne reont droug ebed d'ar re a laosk anezo trafikil. Med a-wechou e roont eun taol pao pe eun taol dant d'ar re a zo sod a-walh da

glask c'hoari ganto pe da rei dezo eun dra bennag. Lod euz an douristed a deu dezo ankounac'haad ez eo an ourzed loened gouez. Eur farser e-neus gellet lavared diwar o fenn : « An douristed a blij an ourzed dezo, med an ourzed ne blij ket atao an douristed dezo. »

Pa deuont da veza re hardiz pe pa vez gloazet unan bennag ganto, ar baotred karget da ziwall ar Park a deu gand eur gaoued vraz a vez bet lakaet eun tamm mel e-barz. Gouzoud a rit pegen sod eo an ourz gand ar mel, ha beb tro e vez paket heb poan. Ha goude e vez kaset pell er menez en eul leh hag a ne hello ket ken sevel a bao war den ebed.

NOZVEZ DIWEZA AR BLOAZ E KNOXVILLE

Mond a ran goustad dre ar ruiou, heb selled re peleh ez an. Ar feson-ze da bourmen eo, a gredan, an hini wella, an hini a heller gweled ar muia a draou ganti.

Sofjal a rankan n'on ket greet evel tud ar vro-mañ. Perag ? Abalamour ma ne welan ket anezo koulz lavared o vale. Ne hellont ket ober deg paz. Ne valeont nemed evid mond euz o oto beteg ar vagazenn o-deus eun dra bennag da brena enni.

Hirio, ar ru genta a gemeran a gas ahanon beteg eur vered e traoñ kêr, eun tamm bered bihan-bihan, souezuz a-walh da weled en eur gêr vraz. N'he-deus ket oustenn tregont metr hed war ugent metr lehed. Endro dezi n'eus ket zoken eur voger, n'eus nemed eun tamm koz gael izel. E-barz ez eus gwez braz ha, dindanno, ugent pe dregont bez, beziou koz gand eun tamm mên griz en o fenn. Eno ne vez interes den ebed ken pell zo. Ar beziou-ze a zo re an dud kenta en em gavet er vro war-dro ar bloaz 1780. Lenn a heller c'hoaz o ano war ar mên.

Ar ru a gemeran goude a zo sao a-leiz ganti. Tomm eo din o sevel beteg an neh. War an dorgenn eh erruan a-greiz-toud dirag eun iliz kaer, pe gentoh eun templ, savet e-giz an ilizou koz e Breiz. Warni, e peb tu d'ar porched, ez eus eur plak; hini an tu kleiz a zo merket warnañ : « Baptist Church », da lavared eo : « Iliz ar Vadezourien », eur rumm protestant; hini an tu dehou : « Immaculate Conception », da lavared eo : « (Ar Werhez) Krouet Dinamm ». An daou blak a zo merket warno c'hoaz ez eo bet savet an iliz er bloaz 1863, prest goude ma '-noa en em rentet ar jeneral Lee, an hini a oa e penn armeou Stadou ar Hreisteiz, d'ar jeneral Grant, an hini a oa e penn armeou Stadou an Hanternoz, el leh ma oa fort brasa kêr, an hini a oa chomet ar pella da stourm.

En em gavet eno, e tiskennan war-zu kreiz-kêr dre eur ru vihan trafikil a base a-hed an Ti-Kêr. Hemañ a zo eno e-touez eur bochad gwez dero ha gwez fao uhel, en eur park leton braz hag a hell pep hini mond e-barz e-giz ma kar. N'eus moger ebed endro dezañ. Pevar pe bemp ti all heñvel a zo e-kichen, bet savet oll e-kreiz ar hantved diweza, evel ma veze savet gwechall-goz templou an doueed er Gres. Brao a-walh int, nemed al liou griz a zo bet roet dezo a laka anezo da veza trist da weled, dreist-oll pa vez goloet an amzer, evel hirio.

O KLASK EUR VOUTAILLAD WIN

En eur zistrei d'an otel, e teu da zoñj din ez om pedet, Per ha me, gand eur hamarad labour dezañ, da vond da zebri on hoan emberr en e famil. Deg devez zo, em-oa bet ar chañs, er Hanada, da gaoud tro da vond da zebri en eur famil. Hirio e kavan em-eus muioh a chañs c'hoaz marteze da veza pedet gand eur famil amerikan da dremen ganti nozvez diweza ar bloaz.

Eun tamm aon am-eus goulskoude bremañ dre ma tosta an eur, aon rag ma ne ouezfen ket en em denna gwall vad gand kamarad Per hag e dud, rag ind-i ne ouezont ger galleg ebed ha me n'on ket re varreg war ar saozneg.

Lavaret ez eus deom en em gavoud abred, etre c'hweh eur hanter ha seiz eur. Amañ e vez debret a-liez koan da c'hweh eur. Dre ma ne anavezan ket ar re a bed ahanon, em-eus c'hoant kinnig eun dra bennag dezo. Hag e soñjan kas ganen eur voutailad gwin Bourdel, hini mad, ma vez posubl. Med ne gredoh ket ahanon marteze pa lavarint deoh em-eus bet mil boan o kaoud eur voutailad win.

Kêr Knoxville a zo eun tamm brasoh eged Brest. Med e kêr Vrest ne reoh ket daou hant paz heb kavoud eun ispisiri hag a vo enni meur a seurt gwin. Amañ, kaer on-eus galoupad, ne gavom ket an disterra boutailad e magazenn ebed. A-hend-all e kav din, keid-all zo ma n'em-eus ket tañvaet eur banne, ma vije bet gwin en eur vagazenn bennag, em-mije santet ar c'hwez kant paz a-raog. Greet on-eus kazeg. Med just pa 'maom dija o vond da zougen kañv d'ar voutailad win, e kouezom war eun den avizet mad hag a lavar deom ez eus e kêr eur vagazenn, unan, hag unan nemetken, hag a heller kaoud enni gwin a beb seurt ha boeson all gand alkool. Mond a reom di hag e kavom ar gwin am-oa da gaoud. Med n'eo ket bet heb poan !

Hag e soñjan n'eo ket e Knoxville eo e vez lonket boutailla-

dou whisky, evel ma weler henn ober er filmou sinema. Ne gaver ket zoken eur werennad en ostaleri ebed.

Ti kamarad Per a zo eur pennad brao euz an otel, distro diouz an hent braz, e-touez ar gwez, en eur ru hag a n'eus ket kalz a houlou enni. Abalamour da ze on-eus eun tamm poan o kavoud anezañ.

Pa en em gavom ez eus greet deom eun degemer laouen. Norman S., kamarad Per, a zo eun tamm kosoh eged hemañ. E wreg a zo brun eveltañ, ken braz hag en ha ken kreñv, eur vaouez koant, nemed ez eo eun tamm re deo evel he gwaz. Eur vaouez hegarad eo ive ha, beza ma 'mañ o hedal eur bugel, leun a vuhez. Ne baouez ket da zond ha da vond euz ar zal d'ar gegin. Klask a ra dioustu on lakaad en on êz, Per ha me. O merh, Tracy, eur baotrezig vrag tri bloaz, brun evel he zad hag he mamm, a zo eur baotrezig lent. Ne lavar ger ebed. Dirazom ne ra nemed digeri braz he daoulagad.

Er zal ez eus c'hoaz eur plah yaouank, eur vignonez d'an intron S., bet er skol ganti ha deuet da baseal gouel Nedeleg hag ar Bloaz-Nevez. Homañ a vije eur plah koant meurbed ma ne vije ket ken teo; med laouen hag hegarad eo.

KAFE GAND SKORN WARNAN I

Ne lavarint netra deoh diwar-benn an ti nag ar zal. An ti, n'on-eus ket gwelet anezañ, en noz. Ar zal, n'eus enni netra gaer. An dud dre amañ, a gav din, ne glaskont na meubl kaer, na meubl ker, na zoken meubl paduz. C'hoant o-deus kentoh kaoud meubl êz, meubl hag a heller cheñch a-liez, koulz lavaret pa vez c'hoant. Amañ, ar meubl a zo toud meubl houarn.

On ostiz hag on ostizez a zo laouen pa ginnigan dezo va boutailad gwin Bourdel.

A-raog ar pred e chomom eur pennad brao da gonta kaoziou. Goude, an intron S., etre ma 'mañ he gwaz er jardin, o lakaad kostennou pemoh da hrilla, a ginnig deom eun aperitiv souezuz a-walh e vlaz. Mad eo goulskoude. « Petra eo an aperitiv-mañ, intron ? » a houlennan diganti. « Biskoaz n'am-eus kavet ar blaz-mañ d'eun aperitiv. » — « O ! nann, sur, aotrou, emezi, me eo am-eus greet anezañ. Gand petra a gav deoh ? Ne zivinfeh ket. Gand rom, gand whisky deuet euz an Holland ha gand siro sukr korz. N'eo ket diêz da ober. Ar whisky eo a ro e vlaz dezañ. »

Etretant e laka gwer war an daol, diou werenn da bep hini,

unan vihan hag unan vraz, med braz ! da lakaad eul litrad da vihanna ! Eur werenn moan-moan diouz an traoñ ha ledan-kenañ diouz an neh, eun tamm heñvel ouz ar podou a vez lakaet e Breiz a-blasou war ar beziou da lakaad fleur. An intron a houlenn diganeom : « Petra ho-peus c'hoant da eva ? » hag e laka da bep hini en e werenn eur bannig bihan a de pe a gafe, hervez e c'hoant, ha war hemañ eur bern tammou skorn ken na 'z eo leun ar werenn.

On ostiz a deu d'e dro da gaozeal ganeom, pa '-neus echu da lakaad ar hostennou da hrilla e-giz ma'z eo dleet, a-zioh ar glao beo. N'em-eus ket re a boan oh entent ar pezh a vez lavaret. Med re vuan e ya eun tamm ar gaoz evid ma hellfen kemered perz enni.

Ar pred a zo simpl, med aozet mad.

Goude ma'z eo echu, e chomom eur pennad brao da gaozeal. Komz a reom diwar meur a dra, dreist-oll diwar ar feson da vevañ en Amerik, er Frañs hag e Breiz.

Evel ma 'mañ ar hiz er vro, e kuitaom abred on ostizien, war-dro deg eur hanter.

Laouen om bet, Per ha me, o tremen evel-se eul lodenn euz noz diweza ar bloaz en eur famill drañkil hag eüruz.

Y. Miossec,
Da veza kendalhet.

STAD AR YEZ A-BENN 20 VLOAZ

Dre ma n'emaom ken nemed 20 vloaz euz ar bloavezh 2000, he-deus c'hoanteet ar gelaouenn halleg « Le Peuple Breton » gouzoud gand ped a dud — pe gentoh gand piou — e vije komzet brezoneg a-benn neuze (1). E niverenn miz genver eo bet embannet gand kazetenn an UDB ar responchoù a oa bet greet dezi diwar ze gand eun eiz a dud (2).

E-ser eur berr a renta-kont evel hemañ, e vije diêz burutella amañ an oll boeñchoù a zo bet komzet diwar-no — pe n'eus ket bet greet — e-kerz an diviz-ze : pajen-nadou eo a zo peadra da skriva diwar ze. Daoust m'o-deus komzet ar re a oa bet pedet euz kalz traou a-bouez-braz, n'heller ket lavared koulskoude ne jomer ket war e naon o lenn diviz « Le Peuple Breton ».

N'eo ket hebken n'o-dije ket bet displeget an divizerien, a-benn ar fin, na ped a dud a vo o vrezonega a-benn 20 vloaz ahann, na peseurt tud e vint, na peseurt brezoneg a vo ganto. Med da genta, n'o-deus ket klasket disklêria en eun doare resiz na penaoz emañ bremañ an traou war dachenn ar yez, na penaoz int bet araog.

Araog peb tra e vije bet red displega ar pezh ah intenter, pa gomzer euz « ar vrezonegerien » :

— Daoust hag eo ar re na ouijent nemed brezoneg ? Hirio an deiz, ne dle beza nemed eun toulladigou tud ha ne ouijent ket a halleg. N'eo ket bet kont evelse dalhmad avad. E 1950 c'hoaz, hervez F. Gourvil, e oa e Breiz-izel eur 100.000 a dud ha ne gomzent nemed brezoneg. Araog Dispah 1789, eo 80 % euz ar Vreiz-izel eo na ouijent ket a halleg; araog ar brezel all, e oa c'hoaz tro 60 % anezo.

— Daoust hag eo an oll re hag a zo barreg da gomz ar yez ? Hervez eun enklask bet greet war eur standilhon a 500 a dud en hanternoz Penn-ar-Bed, war houlen ar SEMENF, eo 46,3 % euz an dud eo o-deus respontet e oant gouest da gomz (3). Ma tigemerer eur seurt dregantad evid Breiz-Izel a-bez, eo tost da vad eun hanter euz ar Vreiz-Izel eo a vije barreg da gomz brezoneg, da lavared eo war-dro 650.000 pe 700.000 a dud.

— Daoust hag eo nemedken ar re a ra gand ar brezoneg evid ar muia, da lavared eo an dud hag a gomz brezoneg aliesoh evid na reont galleg ? Hervez eur sondaj all bet greet e 1970, eo 11 % euz an oll Vretoned a 15 vloaz hag ouspenn, e Breiz ar 4 departamant, eo a vije da renka e-barz ar rummañ, da lavared eo war-dro 200.000 a dud. Ma vez dalhet kont euz ar re n'o-deus ket respontet, e heller konta moarvad beteg 300.000 a dud hag a raje gand ar brezoneg aliesoh evid na reont gand ar galleg.

Mad e vije bet, beteg eur serten poent, derhel kont euz eun trede rumm a dud, ha n'int ket dianaoudeg euz ar brezoneg, eo hini ar re a zo barreg da gompren ar yez tamm pe damm, ha zoken da zistaga eur ger bennag gwech ha gwech all. Bez' e vije anezo tro 14 % euz an dud en hanternoz bro-Leon, da lavared eo talvoudegez eun 200.000 bennag a dud e Breiz-Izel a-bez. Med anad eo eo « kollet » ar peb brasa euz ar re-mañ evid ar yez a-benn bremañ.


Konchou olleg n'int ket toud avad. Rag diskouezet mad o-deus an enklaskou ket greet gand Ar Falz eun nebeud bloaveziou 'zo er skolachou hag el liseou, n'eus nemed etre 3 ha 7 % euz ar skolidi hag a zo gouest da gomz brezoneg en eun doare êz (20 % koulskoude e Kallag, med e nebleh all ne zeblant beza kemend-all) (4). A-benn bremañ he-deus greet piramidenn ar vrezonegerien hervez o oad, eul lamm-penn e-keñver hini an oll dud a zo er vro.

Er hêriou eo e komzer an nebeuta a vrezonég, ha war ar mêz, ar muia. Desketoh a ze e ver, nebeutoh a ze e vrezonég. E-keñver micher, eo al labourerien-douar eo a ra ar muia gand ar yez (ha dre vraz, an oll dud diwar ar mêz, artizaned, konversanted vihan, hag all...) hag ar re a ra an nebeuta eo ar re o-deus labouriou uhel pe micheriu « a-ziarao » (evel ar glaskerien, ar vistri pe ar hadrou en uziniou hag er bureoiou, hag all...).

Ken e heller tresa evel-henn poltred eur vrezonég etre (5) : bez' eh eo eul labourer-douar a vicher, oajet a 50 vloaz da nebeuta, hag a zo o chom kentoh en eur barrez vihan war ar mêz.

Ar vrezonegerien etre, ahendall, n'int ket barreg na da lenn na da skriva o yez, pe da vihanna, ne reont ket. Hervez eur studiadenn a zo bet greet diwar-benn ar gelaouenn « Al Liamm » (6), n'eus ket nemeur a beizanted, a artizaned, a konversanted vihan nag a vicherourien o lenn ar helaouennou brezoneg. Ar re a ra, a vije kentoh bourhizien-vihan : kelennerien, studierien, beleien, medesined. Ar gont on-eus gelllet ober, ouspenn, ne oa ket, e 1973-75, muioh evid 2000 a dud moarvad o prena ingal kelaouennou brezoneg. En eur lakad e vije war-dro 5000 anezo bremañ (hag e hell beza) hag en eur lakad e hell beza lennet peb skwerenn euz eur gelaouenn gand 2,5 a dud (pez a zo kalz marteze), on-nije war-dro 12.500 a dud kustum da lenn brezoneg : lakom 15.000, kement ha kaoud eur gont rond. Ar re-mañ eo a heller ober anezo ar vrezonegerien emskianteg, moarvad.

Setu aze e peseurt stad ema ar yez, er poent-mañ. Eun dra all a zo koulskoude ha n'eo ket bet displeget kennebeud gand divizerien « Le Peuple Breton » eo euz a begement eo bet diskennet niver ar vrezonegerien (5) abaoe eur hantved. E fin ar hantved all, eo war-dro 95 % euz ar Vreiz-Izel eo a gomze brezoneg evid ar muia. Etre an diou vrezel, e 1928, ne oa ken nemed 70 % ; war-lerh ar brezel diweza, 55 % ; hirio, ne vije ken nemed 20 % bennag.



Implij ar brezoneg e Breiz-Izel euz araog an Dispah beteg en amzer hirio.

1. Ar gont a dud o chom e Breiz-Izel.
2. Ar gont a vrezonegerien ha n'ouzont ket a halleg.
3. Ar gont a dud oh ober gand ar brezoneg muioh evid gand ar galleg.
4. Kont an oll dud o houzoud brezoneg.
5. Kont an oll dud o houzoud galleg.
6. Ar gont a hallegerien ha n'ouzont ket a vrezonég.

Pa 'h ouzom eo ar re a ra ar muia gand ar brezoneg, labourerien-douar oajet dija, n'eus ket da zoñjal e vije er bloavezh 2000 berniou tud o komz brezoneg bepred aliesoh evid galleg : ne vo, diouz eun tu, nemed ar re hag o-devo bet greet dalhmad, dre red pe dre gustumañs; ha diouz eun tu all, ar re o-devo bet greet an dibab d'henn ober hag a hello henn ober e gwirionez. P'e-neus skrivet Per-Jakez Helias ne vije ken nemed 25.000 a vrezonegerien er bloavezh 2.000, eo euz ar rumm-mañ eo e oa o kaozeal (7).

N'eo ket evid se e vo prest ar brezoneg da vervel benn 20 vloaz ahann. Nemed eo red mad gweled e vo bepred nebeutoh-nebeuta a dud war ar mêz, ha muioh-mui er hêriou. A-benn 1985 dija, ne vo ken nemed 110.000 labourer-douar e Breiz ar 4 departamant (e-leh 326.000 e 1968, 17 vloaz kentoh nemedken) hag e tleje beza 45 % euz ar Vretoned o chom e kêriou a vuioh evid 70.000 a dud. Hag henn gouzoud a reer, debredrezed ar brezoneg eo ar hêriou.

Daoust hag e heller gouzoud, barz ar gont-se, ped a dud a vo gouest bepred da gomz ar yez, er bloavezh 2.000 ? Hervez eun enklask bet greet en eur barrez a vro-Dreger, hini Treleven, e rumm an dud oajet a 50 vloaz pe ousspenn, ez eus bremañ 80 % a vrezonegerien (da lavared eo, tud oh ober kerkoulz all gand ar brezoneg ha gand ar galleg, hervez an digouez); e rumm an dud 20-50 vloaz, n'eus nemed 66 %; e rumm ar re yaouank dindan 20 vloaz, n'eus nemed 9 %.

A-benn 20 vloaz, e ranker gweled e vo marvet eun toullad mad a dud euz ar rumm kenta. Ar re yaouank n'eo ket sur e chomfent oll e Treleven, ha ma h eont da leh all, n'eo ket lavaret e talhfent da vrezonega. Diwar ar skwer-mañ e hellom gweled ne vo ket muioh evid 15 pe 20 % euz an dud gouest, er bloavezh 2.000, da gomz brezoneg, leh ma zo bremañ tost d'eun hanter anezho hag a zo barreg d'henn ober.

Ma vez heñvel e peb leh, e tleje beza c'hoaz war-dro 200.000 a dud barreg da gomz brezoneg a-benn 20 vloaz ahann, e Breiz-Izel a-bez, tud hag o-devo bet desket anezañ « war barlenn o mamm. » Med kosaet e vint bet ahann da neuze : nebeutoh-nebeuta a vrezoneg ah ouezo ar vugale, hag er bloavezh 2000, en doare ma h a an traou, ne dleje ket beza muioh evid 10 % euz ar vrezonegerien dindan 40 vloaz. Hag al lodenn vrasa eo muioh evid 60 vloaz eo o-devo, pe e vint war o leve.

200.000, a-dra-zur, na vo ket eur gont dister. Med zoken ma vez bepred kement-se a dud barreg da gomz ar yez, n'eo ket sur e vije klevet kement-se a vrezoneg ganto. Oh ober gand ar brezoneg, henn gwelet on-eus, n'eus a-benn ar fin nemed daou rumm a dud :

— ar re a vez oh ober gantañ dre red, dre ezomm, pe dre gustumañs : ne hell, er stad m'ema an traou, an niver anezho nemed derhel da ziskenn. En 20 vloaz, e pasefe niver ar re hag a ra gand ar brezoneg evid ar muia euz 300.000 da 25.000 pe 30.000. Ha diskenn a rafe eta niver ar re barreg da gomz euz 650.000 da 200.000.

— ar re a vez ober gantañ dre zibab. Med daoust hag e heller konta war ar 15.000 vrezoneger emskianteg a hell beza anezho bremañ, evid ma chomfe beo ar yez pelloh evid ar bloavezh 2000 zoken ? Daoust hag e hell an niver euz ar re-mañ mond war gresk, ha pegen buan ? Ha piou a vo anezho, e-keñver ar vrezonegerien a-vremañ ? En eur dremen, e heller en em houlen ive ha gouzoud a raint mad ar yez.

Lavaret mad e-neus unan euz divizerien « Le Peuple Breton » « n'ema ket ar brezoneg da veza saveteet evitañ e-unan; ma reer gantañ, e vo saveteet e gwirionez. » Sed aze hag a zo gwir, sur mad.

Koulskoude, red eo gweled ha kompren ervad n'eo nemed dre ezomm eo e vez komzet eur yez, peurvuia. Daoust da bez a gred darn, ar brezoneg n'ema ket, beteg vremañ, an ezomm anezañ o vond war greski evid pez a zell an darempredou etre an dud. Ha m'o-devez an dud nebeutoh-nebeuta a ezomm euz ar brezoneg en o darempredou sosial, nebeud ha nebeud neuze, ne vo ken ober gand ar yez nemed eun afer a zibab, hag eun afer a zigouez. Beteg-henn avad n'o-deus ket diskouezet al lodenn vrasa euz ar Vreiz-Izeliz o-doa greet eun dibab a-du gand ar brezoneg.

N'eo ket e vije an dud eneb ar brezoneg. Hervez eun enklask bet greet e Brest, eo 58 % euz an dud eo a vefe a-du (mui pe vui) da rei eur gwelloc'h plas d'ar brezoneg er vro, n'eus nemed 34 % hag a zo dizeblant, ha 6 % a-eneb (8). Med ar re goz hag a oar ar muia a vrezoneg eo a zo ar muia dizeblant pe a-eneb. Ha beteg eur serten poent, eo ar re a oar an nebeuta a vrezoneg eo a zo ar muia a-du. N'eus forz penaoz, braz eo an diforh etre « beza a-du gand ar brezoneg » ha dond d' « ober gand ar brezoneg » e gwirionez.

O skriva ar pennad-mañ, n'on-eus klasket nemed sklêrijenn a ol lennerien en eur rei dezo, berr ha berr diwar ar studiou emaoñ o ren, eun nebeud responchou ar resisa posubl, diwar-benn eur gudenn hag ez eus evid gwir peadra da veza prederiet ganti. Ma zo c'hoant e vefe dalhet da gomz brezoneg e Breiz-Izel, e vije red en em zoñjal ousspenn, da houzoud penaoz ha perag eo bet diskennet a gemend-all niver ar vrezonegerien abaoe eur hantved.

Red e vije ive, evel just, gweled war beseurt diazezoù e vo gallet derhel d'ar yez : deski o yez d'ar vugale « war barlenn o mamm » ? ar skoliou « Diwan » ? kelennadurez ar yez er skoliou kenta hag eil derez ? an embannadurioù ? ar radio hag an tele ? rei he flas d'ar yez er vuhez publig ? traou all ? Bez' eh eo kement-mañ hebken eun afer gouzoud petra d'ober, petra hell beza greet, ha peseurt politikerezh a zo da ren evid pezh a zell ar yez. An « aktou a feiz » en amzer-da-zond ar yez ne gasint ket da bell. E gwirionez, ar pezh a zo da houzoù — hag ar pezh o-deus ar Vretoned da zisklêria c'hoaz — eo peseurt ezomm a gav dezo o-deus euz ar brezoneg, p'emaint o vond buan bremañ war-zu ar henta kantved warn-ugent.

F. Broudic

- (1) Qui parlera breton en l'an 2000 ? « Le Peuple Breton », genver 1980.
- (2) P. Combet, R. Huon, D. Laurent, R. Leprohon, R. L'Hostis, F. Morvanou, Y.-B. Piriou, G. Quillivéré.
- (3) Stad ar Brezhoneg e bro-Leon. « Al Liamm », n° 195, gouere-eost 1979.
- (4) Le breton en chiffres. « Ar Falz », n° 16, gouere 1976.
- (5) Brezoneger, amañ : unan hag a gomz e yez aliesoh evid ne ra galleg.
- (6) Bernes Rous : Al Liamm hag e goumananterien. « Skrid », n° 4, gouere 1974.
- (7) Ma 'z eo bet kavet « realiste » e gonchou da Helias gand unan, divizerien all o-deus tamallet dezañ e lez-ober. N'eus ket pell koulskoude, e-neus diskouezet ar skrivagner pere eo e vennoziou en e « Lettres de Bretagne » (emb. Galilée).
- (8) F.B. : Ar brezoneg hag ar vrezonegerien e kêr Vrest. « Brud Nevez », n° 19, du 1978.

EMBANNADURIOU EMGLEO BREIZ

Per-Jakez HELIAS : AN TREMEN-BUHEZ

Oberour « Ar Mên Du » ha « Maner Kuz » a ginnig amañ, en eur vond a-eneb red, balizennou tregont vloaz a skiant varzel m'emañ an eienn outo, peb enaouerez er-mêz, er yez vrezoneg.

Ne gredan ket e teufer barz er bed-mañ. Nebeutoh c'hoaz e hellfer dond da varz. An hini ma vez grêt outañ barz n'eo nemed eun ostiz en desped dezañ, neiz amprestet ar goukoug barzoniez. Ar barzoneg a zo krouadur ar goukoug. Gand an ostiz e chom an enor hag ar gefridi da veza e dad mager. Kement-se ne zigas deoh soñj euz netra ?

E gwerz e ti an oll varhadourien vad : 40 lur.
Pe digand Brud Nevez, 6 ru Beaumarchais,
29200 BREST.

Rentaou-kont

ANKOUADENNOU ?

Gand Bernard le Nail an hini eo bet savet ar « Guide-annuaire culturel » a zo bet nevez laket da zond er-mêz gand ar CNCC : Kreizenn ar Zevenadur Keltieg e bro an Naoned (1). Eur wir leor a 120 pajenn hag ouspenn, hag a gaver ennañ eur bern listennoù : hini izili ar Huzul Sevenadurel, eur roll kanerien ha muzisianed, listenn ar bagadoù hag ar helhiou keltieg, listenn ar mirdioù hag al levraouegoù a zo e Breiz, eur roll kelaouennoù, hag all... Bez' e kaver zoken e-barz ar « Guide-annuaire » roll ar « zoo-iou » a zo er vro, hini an tiez a re yaouank, hag evid bro an Naoned, hini ar homiteou-staliou-labour (C.E.). Korn-bro an Naoned eo a zo servijet ar gwella, ha n'eo ket souezuz, peogwir eo gand eun Naonedad an hini eo bet greet al labour.

Evel m'ema, e talvezo al leor da galz a dud, moarvad. Ha koulskoude, nag eo niveruz an ankoùadennoù ! Da skwer, ne gaver nebleh chomleh ar federasionoù braz evel B.A.S., Kendalc'h, Bleun-Brug, War 'l Leur, Al Leur Nevez... Ne weler ket perag n'eo ket bet meneget Bagad Brest Sant-Mark, unan euz a re vrudeta koulskoude. Mankoud a ra ive eur bern kanerien ha muzisianed a beb seurt (kanerien-bobl, lazou-kana, strolladoù folk... med gwir eo ez eo diêz sevel eur roll klok anezo. N'eus ket bet soñjet ive er servijou ofisiel a ro o flas d'ar brezoneg : rannou keltieg ar skoliou-meur, abadennou brezoneg an tele... Pa 'z eus bet laket kalz a boan da venegi kalz a strolladoù all, euz « Kenvreuriezh Prederouriezeel an Druizhed » beteg ar « Société d'Astronomie de Saint-Nazaire. » Goulenne a ra an embanner beza digarezet evid an ankoùadennoù a hell beza er leor : n'eus rézon ebed ne vije ket, evid ar re-ze.

Koulskoude, ez eus e leor Bernard le Nail mankou hag en em houlenner hag ez int gwir « ankoùadennoù. » Sañset, ne vije er vro-mañ nemed daou embanner a leoriou brezoneg : Emgleo Breiz, evel just, n'ema ket en o zouez. Ne ginniger ive nemed leoriou en daore-skriba peurunvan a 1941 evid studia ar yez : ne veneger ket d'an nebeuta na leoriou an Dr Tricoire (a zo euz koztez an Naoned koulskoude), na re Visant Seité, na doare-kelenn Le Dû-Le Berre. Ne reer ket a vruderez evid skol dre lizer V. Seite nag evid hini A. Merser, pa reer (diou wech memez) evid unan all.

Daoust ha divizet ez eus bet lezel a-gostez an oll dud ha strolladoù-za a labour war dachenn ar yez, ha perag ?

Brud Nevez.

(1) 52, rue du Marchix, 44000 Nantes.

KELAOUENNOU NEVEZ

Kelaoennou all e zo krog da zond er-mêz. Daoust ha lennerien a gavint oll ? Se zo eun afer all, pa h ouezer pegen nebeud a vrezonég a vez lennet gand an dud, ha pegen bresk eo buhez ar helaoennou brezoneg, aliez.

Ar re a zo oh embann « Planedenn » (1) a oa sur mad ar zoñj-ze war o spered, p'o-deus en em houlennet en o niverenn genta hag-eh n'eo ket red beza bet kollet e skiant vad evid ober war-dro eur gelaouenn nevez e brezoneg. Tud euz « Ar Falz » eo ez eus anezo, ha setu perag ema skrivet « Planedenn » en hini nevesa euz an doareou-skriva on-eus, an hini « etre-rannyezhel », na petra 'ta. « Bountet e vo war-raog gand eun neptuegez digor d'ar seiz avel » ha bouetet gand pennadou a beb sort, ha n'eo ket hebken gand pennadou lennegel.

Dedennusoh a galz eo an niverenn genta evid an eil. En eil, ez eus dreist-oll peziou-c'hoari — ha n'int ket didalvoud koulskoude — gand Strollad Plougin. Mez en hini genta, e oa eur pennad-kaoz hir gand Naig Rozmor, diwar-benn stad ar merhed e Bro-Leon gwechall (2). Bez e oa c'hoaz pennadou-kaoz gand tadou ha mammo-familh hag a glask desevel o bugale e brezoneg. Peder gwech ar bloaz eo e tle « Planedenn » dond er-mêz.

Daoust hag eur gelaouenn a heller ober euz « An Amzer » (3) ? Tamm ebed, a-boan ma 'zo eo eur gazetennig. Kredet o-deus an nebeud re yaouank a zo oh ober war he zro e oa ezomm euz eur seurt gazetenn da rei keleier d'ar vrezonegerien, deuz ar vro ha deuz ar bed. Med ne zesker netra nevez, morse, o lenn ar 4 bajenn verr en em gav beb sizun gand ar houmananter : pelli a vez e vez bet kavet pe klevet ar heleier-ze e leh all. Ma vije skrivet « An Amzer » c'hoaz e brezoneg reiz. Med n'eo ket. En em zigarezi a ra ar re yaouank a skriv e-barz, en eur lavared n'int ket brezonegerien a-vihannig — pezh ne damallo den dezo — hag eo diêz dezo « kemer o amzer da skriva eur yez disi » ! Mond d'ar skol neuze, evid deski penaoz skriva... buan ha mad.

Kelou zo euz eur gazetenn all c'hoaz, hag a vo anvet « Bremañ » (4). Beb eil miz eo e tle beza laket da zond er-mêz gand Skol an Emsav, ha sañset e vo kavet warni « keleier diwar-benn ar stourmou e Breiz hag e leh all. » Evid gwir, an niverenn zero a lenner warni pennadou diwar-benn Plogo, ha manifestadeg Montroulez. Dre ar gelaouenn-ze, e fell da Skol an Emsav rei ar gomz d'an oll re a vez o stourm, en eun doare araokour, war an dachenn-mañ-tachenn. Gortozom da weled.

N'eo ket eur gelaouenn vrezonég, med unan « gallo » an hini eo « Le Lian ». Teir niverenn a zo bet embannet anezi dija, en eur bloaz, nemed he-deus ar memez kudennoù ha « Brud Nevez », pa vez war-lerc'h o tond er-mêz... Tabutal (en eun doare seven, evid c'hoaz) a reer barz « Le Lian » war an doare gwella da skriva ar gallo, pe da houzoud hag ema ar gelaouenn da veza savet penn-da-benn e gallo pe evid eul lod e galleg. Beteg-henn ez eus bet pennadou galleg flour, ha traou dedennuz da lenn diwar-benn broiou Bazouges-la-Pérouse pe Dol. Kalz a bennadou all a zo diwar-benn gizioù-pobl, soniou, kontadennoù ha sonerez. Keleier ive diwar-benn al labour a vez greet gand « Les Amis du Parler Gallo. » Neb a fell dezañ heuilla dihun ar Vreiz-Uheliz eo med dezañ lenn « Le Lian » (5).

J.S.

- (1) Planedenn, I, plasenn ar Marhallah, Montroulez.
- (2) Ar hiz a zo, gand ar peb brasa deuz ar helaoennou, da venegi ti biou e vez bet mouillet al leoriou a gomzer anezo. Plijet e vijem bet ma vije bet roet da houzoud da lennerien nevez « Planedenn » eo gand « Brud Nevez » eo bet embannet barzonegou « Karantez ha karantez » Naig Rozmor.
- (3) An Amzer, 2 straed ar Richardière, Roazon.
- (4) Bremañ, 8 stread Hoche, Roazon.
- (5) Le Lian, BP 48, 22190 Plerin.

PROMOTOURIEN E TREHOED

— Penaoz ? N'anavezet ket c'hoaz bannou treset Christin ha Bilal ? Med bez' ema o fevare leor o tond er-mêz !

Heb re a vez eo eh zavis kerket e oa gwir n'am oa bet lennet netra c'hoaz gand an daou-ze. Kement a draou a zo war an douar, hag a dremen an nen en o hichen heb gouzoud dezañ... Ha war ar marhad, ne vezan ket dalmad o lenn bannou treset, daoust ma ran meur a wech gand plijadur. Plijadur a vez evid gwir o lenn an albomou a zo bet savet gand an daou abostol-ze.

Tri bloaz 'zo a-benn bremañ, ma n'eo ket ousspenn, m'o-deus int embannet o oberennou kenta (1). « La croisière des oubliés » n'am-eus ket kavet, ha n'ouzon ket peseurt doare leor eo, med war « Le vaisseau de pierre » on kouezet. Ha peadra a zo e gwirionez da veza dedennet gand eur seurt « mojenn a hirio » : kaer he-deus beza a-hirio, e meur a gehver eo tre e doare ar hoñchennoù koz a veze dibunet n'eus ket keit-se 'zo c'hoaz e korn an oaled : dreist-ordinal.

Diazezet eo, evel just, ar vojenn a hirio-ze war zervoudou a-vremañ. Evel m'en em gav aliez, promotourien eo o-deus greet o zoñj ober o domani euz parrez Trehoed. E Breiz-Izel, eo e tremen an istor. Ha pa deu promotourien da lakad o hrabanou war eur horn-douar bennag, euz toud an douar eo o-devez ezomm da zevel otaliou, tiez braz ha tiez bihan, staliou-koñverz, hag all... Ne vez ket marhatet zoken evid cheñch plas da gastell koz ar barrez, ha kement-mañ oll gand harp ha skoazell pennou braz ha tud e karg. Tud ar vro n'o-devez ken nemed diloja d'ober, ha sacha o skasou ganto da leh all...

Setu d'an nebeuta penaoz e pase an traou 'barz an istor a vez kontet gand Christin ha Bilal. Med ar promotourien a oa bet savet o flañioù ganto heb derhel kont euz beleg yaouank ar barrez — eur beleg a hiz nevez, war a zeblant, med tost euz e dud bepred — hag heb derhel kont dreist-oll euz an Ankou — brezoneger — a zo o chom a-viskoaz er hastell.

Diloja, setu drez pezh a raio Trehoediz en eun nozvez hebken, ken ne jomo an dez war-lerc'h ebed na deuz ar vourh, na deuz an tiez na deuz ar hastell. N'eo ket hebken an dud a hirio, med o hendadou eo a adsavo ive deuz o bez, war urz an Ankou, da vond da heul o bugale veo, hentchet gand eur vag vaen, da glask eun douar all.

N'eo ket gand ken nebeud e vo tapet ar bromoteurien. Med ar pezh a zo plijuz en istor-mañ eo ar meskaj a ra bepred an daou oberour euz kredennou koz hag euz darvoudou a-vremañ. Re dost e talhout a-wechou da « glichedou » 'zo, med n'eo ket prest o « foltrejou » da veza treset fall daoust da ze. Moarvad ne gomz an Ankou brezoneg en istor nemed evid ober muioh dreist-ordinal, med kement ha lakad anezañ da vrezonega, e vije bet koulz lakad anezañ da zistaga eur yez reiso.

An eil leor am-eus lennet diwar blunn Christin ha Bilal – « La ville qui n'existaît pas » – n'eo ket euz Kêr Iz eo ez eus kaoz ennañ, ha n'e-neus mann ebet da weled gand danvez Breiz. Ken dedennuz all eo avad, savet ma 'z eo diwar an huñvre koz o-deus bet a-viskoaz an dud da zevel eur gêr-baradoz, eur gêr kalz kaeroh evid ar re ah anavezom. Ken just eo an tresadennoù el leor-mañ ha ma oant en egile. Er heñver-mañ, e-neus Bilal eun taol-pluenn euz an dibab.

F.B.

(1) Embannet gand Dargaud.

LEORIOU-STUDI NEVEZ Le breton parlé

Ema Meriadeg Herriou o paouez embann « le breton parlé » (1). Sed aze eur mell leor a vo red da beb brezoneger « emskianteg » lenn hag adlenn anezañ a-liez. Da dud Wened e vo talvouduz-dreist da genta toud evel just, med da dud ar H.L.T. e vo ken talvouduz all.

Kavet e vez e-barz 35 kentel a ya da heul « Le Breton par l'image », gand eun droidigez e galleg evid ar re a studi ar gêr. Gand peb kentel ez eus notennoù yezadur ha poelladennoù (pennadoù da lakaad e galleg ha re all da lakaad e brezoneg). Beb a dresadenn gand J.J. SEVELLEC a zo gand ar henteliou, evid rei tro da gomz diwar he fenn.

Ar pezh a gavan an talvoudusa e-barz eo an notennoù puil diwar-benn ar brezoneg evel ma vez komzet. Re a-liez e vez techet ar re a skriv brezoneg da « eeuna » o yez.

Duspenn an notennoù yezadur a ya da heul peb kentel, e vez kavet re all e penn al leor ha re all c'hoaz e kreiz. Ganto samez ez eus eur yezadur klok euz ar Gwenedeg, a oa red-mad sevel anezañ pa ne vez kavet hini ebet ken da brena.

Eun trede « leor » ouspenn zo e-barz : eur strobad pennadoù bet skrivet gand Gwenedourien wirion : Golvanig, Job an Gléan, Steven Kerhored (mojennoù doare La Fontaine gantañ), Efflam Koad Skav, J. ar Marechal, Guillom, Roperh ar Mason, Bleu Benal, Loeiz Herriou, Kalloh, Loeiza ar Meliner, F. Falhero, Per Tual. Eun damskoud euz lennegezh vrezoneg Bro Wened.

Ha pa welan kemend a dud a oa – pe a ouie – skriva ken brao, em-eus keuz braz pa n'eus da vad skrivagner ebet ken oh ober gand ar rannyez-se. Klasket em-eus, goulennet em-eus digand va oll vignoned a Vro-Wened, ha siwaz n'am-eus kavet hini ebet evid sevel pennadoù evid BRUD NEVEZ. Marteze, goude beza bet lennet ha studiet ervad leor Meriadeg Herriou, e tiskeno an awen e-barz spered eur Gwenedour bennag hag a zavo danevellou c'hweg evid or brasa plijadur.

Le breton en bandes dessinées

Braz-souezuz eo ar berz gret en on amzer gand ar bandennoù treset, hag implijet eo bet dioustu an doare-ze da gelenn ar yezou.

Skoazellet gand an tresour JOEL-JIM SEVELLEC, e-neus soñjet VISANT SEITE e vefe eun dra vad ober ganto evid ar brezoneg ivez. Goude e rummad leoriou (an hini kenta a oa bet moulet tost da 40 vloaz zo), e-neus gouezet an oberour cheñch e zoareou-kelenn, pezh a zo merk dibar ar « mestr-skol » gwirion (2).

Plijadur o-devo sur ar re yaouank o heulia istorioù an daou vugel, Lizig hag Ivonig, a hellint c'hoari, pa n'eus nemed frazennoù « diviz » ganto. Sed aze unan euz gwella perziou al leor-ze. Frazzennoù berr, re ar vuhez pemdezeg, a vez distaget e gwirionez gand an dud – ha n'eo ket frazennoù trohet dez buhez ordinal ar Vretoned a gaver e-barz. P'o-devo desket ar skolidi hoari anez, sur e vint prest da genderhel gand leoriou all Visant Seite, hag e vo bet sanket don en o spered erredrez dibar or yez.

A.M.

- (1) Da werza e ti Brud Nevez : 56 L (7,90 L ouspenn evid ar mizou-kas).
(2) Ano e leor nevez : Le Breton en bandes dessinées, pour débutants. E gwerz e ti Brud Nevez, evid... lur (ha 3,80 lur evid ar mizou-kas).

**adkoumanantit
heb gortoz pelloh !**

gweloud p. 2

EN EM GAUD EN DOAREOU-SKRIVA

Gouzoud a ra an oll re e vez greet bremañ gand pevar doare da skriva ar brezoneg, gand « doareouigou » ouspenn, evid eun nebeud milierou a lennerien ! E gwirionez, pa ne vez kaoz nemed euz lenn, n'eo ket eur gwall afer, mez pa vez kaoz da skriva, ez eer euz an traou êsa, eeunna, beteg reou zo diêz-spontuz.

Setu perag ema A. Merser o paouez sevel eur studi berr : « Les graphies du breton » (1) hag a vo gonid o lenn anezañ.

Kregi a ra al leorig-se gand eun danevell-skrid diwar-benn istor ar skritur abaoe 1936 pe war-dro, mez n'eo ket bet savet evid-se. Evid êsaad al lenn hag ar skriva, ne lavaran ket, hag evid herzel ouz distagaduriou fall, ken puill gand tud zo. Setu ma vo ar pajennadou diwar-benn kudenn ar staga-geriou ar re bouezusa e-barz al leor.

(1) E gwerz e ti AR HELENNER, 6 ru Beaumarchais, Brest : 3 L (3,80 L ouspenn evid ar mizou-kas).

LIZEROU

Diwar-benn ar « mimi », eur ger a gaved en eur ganaouenn-bobl, war n° 28 Brud Nevez, p. 12, 7ved poz :

– A-berz an DII Kerhoas, euz Pariz : « eur mimi a zo eur stol-feur dougennet er goañv gand merhed Bro-Sizun war horre o mouchouer. »

– A-berz R. Pradig, Le Mans : « ar mimi a oa eur seurt foulenn (diwar krohen eul louarn pe eur gaerell-Rusia) hag a veze douget endro da gouzoug ar merhed kran, e bro-Hall, pe e Bro-Vreiz, war-dro ar bloaveziou 1925 (?). »

Trugarez d'on daou lenner evid o eveziadennoù.

**klaskit eta
koumananterien all
da vrud nevez !**

gweloud p. 2

Ped a dud a vo o komz brezoneg a-benn ar bloavez 2000 ? War-lerh an diviz a zo bet aozet evid klask eur respont d'ar goulenn-ze gand ar gazetenn « le Peuple Breton », e ro F. Broudic e ali amañ, diwar konchou resiz. En eur hantved eo diskennet an niver a dud hag a oar brezoneg euz 95 % da 20 % e Breiz-Izel. Med diwar ar 700.000 a zo bremañ c'hoaz o houzoud ar yez, ne vo ken nemed 200.000 a-benn 20 vloaz. Daoust ha penaoz e vo gallet derhel d'ar yez ? En niverenn-mañ, ahendall, ez a Y. Miossec d'ober tro ar Parkou Broadel er Stadou-Unanet, hag e talh Louis Conq da gonta e eñvorennoù-bugaleaj, en eun doare ken beo bepred.

Ar haner-pobl a Blouigno, Louis ar Brun, ne ehane ket, eñ, da rei kenteliou d'ar bobl da ziwall ouz an noblañs. En eur ganaouenn all bet dastumet gand Kerlann, e kan meuleudi d'an drapo triolor, rag, en amzer a zo o ren, « ar paour e-neus e liberte koulz hag ar pinvidig... »

Combien y aura-t-il de bretonnants en l'an 2000 ? A la suite du débat organisé sur ce thème par « le Peuple Breton », F. Broudic donne ici son point de vue, à partir de chiffres précis. En un siècle, le nombre de personnes sachant le breton a chuté de 95 à 20 % en Basse-Bretagne. Et les 700.000 personnes qui savent toujours le breton ne seront plus que 200.000 dans 20 ans. Que faire pour modifier cette courbe qui descend à toute allure ?

Egalement au sommaire de ce numéro : la visite des parcs nationaux des USA par Yves Miossec, et le deuxième chapitre des souvenirs de Louis Conq, qui s'en va à la découverte de l'école communale.

Au sommaire également, une autre chanson populaire de Louis le Brun, de Plouigneau, qui ne cessait de mettre les pauvres en garde contre le retour de la noblesse, en glorifiant la République.